

Dizano : **Kignad**

Etre daou bastor euz ar re¹ unan a rank mond er-mêz ar vro, eun all a hell chom er gêr, goude eur brezel etre kenvroiz.

Traou 'zo zo diêz da gompren. Sur a-walh ez eus meur a vi-koukoug.

Titir ha Melibee

Melibee

Dindan eru wezenn faou goloet a zeliou,
Titir, emaoñ trankil o son ar biniou,
Ha ni 'rank, siwaz dem, mond pell euz ar vro-mañ',
Or mamm-vro, ar parkou a garem ar muia !
C'hwi, Titir, en keit-se, en disheol ha diskuiz,
A zesk d'ar hoajou-mañ ano Amarilliz.

Titir

Eun Doue, Melibee, en-deus greet din grasou ;
Rag da viken e vezo en-touez va Doueou,
Rag an aoteriou sakr en enor savet
Gand gwad va ain² munud 'liez e vezo trempet.
Eñ, dre e drugarez, eo en-deus va lezet
Da chom e-barz em bro da ziwall va deñved ;
Hag evel ma welit e ro c'hoaz koñje din
Da zon ar biniou war an ton ma karin.

Melibee

N'em-eus ket a avi ; muioh am-eus a zaouez !
En-kreiz an oll drubuill a weler en on touez !
Gouelad a rit, Titir, en desped d'am hleñved,
E rankan da bell-bro mond da gas va deñved.
Setu eun dañvadez am heuill gand kalz a boan ;
Aze war ar roh noaz he-deus leusket daou oan ;
Va esperañs e oant, hag int abandonet
En-kreiz ar hoad kelvez, el leh ma oant ganet.
Ar poaniou-ze 'zo bet disklêriet aliez
Din dre galz a skweriou ma lakajen evez.
Soñj am-eus meur a wech da veza bet gwelet
Ar gurun euz an neñv war gwez dero kouezet ;
Diwar eur goz kleuzenn, e-barz en or hoajou,
He-deus o disklêriet ar vran a wall-gelou.
Koulskoude, o ! Titir, din bremañ livirit
Piou ez eo an Doue a hini e komzit.

Titir

Sod a-walh e oan, Melibee, da gredi
E oa ar gêr a Rom heñvel euz an hini
D'an hini³ 'z om kustum, entrezom Pastored,

¹ ar re : a bere, er skrid orin.

² ain : ?

³ D'an hini Da bini, er skrid orin.

Da gas ken aliez ain on deñvedezed.
Kement hag ar chas braz-mañ ‘grede ‘r re vihan,
Ha kement hag e vamm em zoñj e oa eun oan !
Ar braz gand ar bihan evel-se ‘komparen !
Mez dreist an oll gêriou Rom a zao keit he fenn.
Heñvel ar gwez “cyprès“ a-zioh d’an haleg
Ar re⁴ gand an avel a bleg hag a zispleg.

Melibee

Perag ho-poa kement a hoant da vond da Rom ?

Titir

Al liberte ‘glasken ; di e oa eet da chom.
Greet he-deus a-benn-fin eur sellig a druez
Euz eur hêz reuzeudig, a-raog fin e vuhez ;
Arruet eo goude he gortoz pell amzer,
Pa oa loued va baro dindan dorn ar barver.
Eur wech n’am-boe gallet anaoud Amarilliz,
Servij Galatea biskoaz ne hoantais ;
Rag anzaou, hen a rin, dindan Galatea,
Evid va liberte, neb esperañs n’am-boa,
Hag euz va zamm danvez ne hallen kaoud soursi.
En desped ma kasen kalz viktimou dezi
Euz va loened gwella, ha kalz a lêz kaoulet,
Euz an hini drusa, eviti kaledet,
Euz ar gêr digar-ze pa zistroen d’ar gêr,
Biskoaz gand an arhant va dorn ne oe pounner.

Melibee

Braz ‘oa, Amarilliz, o ! braz e oa va zouez
O weled da anken hag o kleved da vouez,
O vond war-zu ‘n neñvou ; ha da biou e vires
Ar frouez euz ar brankou a-zivill⁵ a lezes ;
O ! n’en-deus⁶ mar ebed, te Titir, a vanke,
Ar gwez, ar feunteuniou hag ar plant a kalvé⁷ ?

Titir

Petra a rajen-me ? ne hallen sortial
Demeuz va esklavaj, na kavoud en leh all
En nebleh Doueou evidon ken douget.
An den yaouank-se eno am-eus gwelet
Ha daouzeg gwech ar bloaz diwar e aoteriou
E savo ar moged demeuz va viktimou !
Eñ, goude beza bet selaouet va fedenn,
En-deus bet diouzin kaozeet evel-henn :
« It, paotred, emezañ, evel ma’z eeh gwechall,
Er peuri ma kerfet da vesa ho chatal. »

⁴ Ar re : Pere, er skrid orin.

⁵ a-zivill : ? Maretze “a-zivi“.

⁶ n’en-deus : n’ez eus.

⁷ a kalvé : ? “a galves“ (?)

Melibee

O ! den koz evuruz, c’hwi ‘chomo en ho pro,
Ha ganeoh e chomo ho touar tro-war-dro !
Braz a-walh evidoh, petra bennag eun tu
‘Zo goloet a vein hag eun all a benndu.
Ho saout prest da hala er vro-mañ a chomo,
Heb rankoud mond da glask eur peuri dizano.
Gand re hoh amezeg, nag e vez ar hleñved,
E chomo dibistig ho saout hag ho teñved.
O ! den koz evuruz, c’hwi a hallo amañ
Kaoud ar freskadurez en-pad tommder an hañv
A-dost da rivierou pell ‘zo anavezet,
Ha da feunteuniou sakr d’ar re⁸ ‘z oh boazet.
Amañ c’hoaz ar gwenan euz ar harziad haleg
A zisparti o lod deuz lod hoh amezeg,
Goude kaoud er vleuenn ar mel o-deus klasket,
Gand fronn o diou askell ho lakay da gousked ;
Amañ an deliaouer a glevot o kana,
En-pad an dommder braz pa vezo oh ehana.
Dindan ar harreg-vraz, c’hoaz ma bez selaouet,
E klever o voudal mouez ar gudon raouliet,
Hag euz ar wezenn oulm, diwar ar brank uhel,
E klemmo hirvouduz mouez trist an durzunell.

Titir

Ar haro e droad skañv a zavo ‘ta kentoh
Euz ar hoajou en êr da beuri a-zioh ;
Ar pesked a deuio euz a oueled ar mor,
Noaz-beo e tornotjou kent da glask ar sehor ;
Rivierou ar sao-heol a deuio kent en-dro
Da zoura ar huz-heol, daou vil leo euz or bro,
Evid na vez gwelet o vankoud da chom don
Ker braz madelezou ingravet em halon.

Melibee

Ha ni tud glaharet, allaz, a ranko mond
Da dreina on anken, darn du-mañ, darn du-hont ;
Darn a yel’ d’an Afrik gand an heol da zeви,
Darn en-touez ar Seited gand ar skorn da reudi,
Darn all da enez Kret a yel’ da glask o flas,
War bord ster an Oax, he-desu kement a gas•
Pe a yelo pelloh da vro a Vreizaded,
Gand ar mor a bep tu euz ar bed distaget.
Kenavo ‘ta, va bro, na welin ken biken,
Nag ar hoz-ti moudet en hini⁹ e kousken,
C’hwi, va rouantelez ! Nann, nann, eun den digar,
Brezelour disvroet, en-devo an douar

⁸ d’ar re : da bere, er skid orin.

⁹ en hini : en pini, er skrid orin.

Am-eus-me labouret gand kement a zoursi !
Setu pegeid e kas daou rumm o hasoni !
Ken a gouez war ar bobl a bep seurt maleuriou !
Setu 'ta evid piou eh hadem or parkou !
Melibee, kee bremañ, kee dastum piz da ber,
Kempenn da winienn, lak anezi a-skwer !
Kerzit, kerzit, va gevr, gevr bet evruz gwechall,
Ne ganin mui gwerzjou pa vin euz ho tiwall !
O ! va deñvedigou, n'ho kwelin mui biken
A-grab euz ar rehier o peuri ar hlazenn !
Nann, va gevrigo paour, va daoulagad pelloh,
A-zindan ar bod glaz ne welint ahanoh
O krignad ar "sitis"¹⁰ pa zigor he bleuenn,
Pe ar bourjon c'hwero a boulz en halegenn.

Titir

Er vro-mañ, koulskoude, c'hwi 'halllo c'hoaz fenez
Chom e-barz em zi-me da gemered repoz ;
Avalou dous am-eus da rei deoh, mar keret,
Kistin poazet en dour ha kalz a lêz kaoulet.
Deom ahann, poent eo mond ; dija diwar pep kêr
E weler ar moged o tibrada en êr ,
Hag ar skeud a ziskenn euz an uhelennou
En em astenn dija hir van war an tachennou.

*(Hervez eun noetmbet skrivet gand an dorn, e vefe ar skrid-se eun heñveladur ouz eur skrid bet savet e latin
gand Virgilius).*

¹⁰ sitis : galleg "cytises"